

# Dirnador

## Paotr e vragou berr

Pez-c'hoari bet embannet en eul leorig e 1908 a-unan gand "Tog Jani"

### Tudennou

**Yann**, 17 vloaz, mentet braz.

**Job**, 21 bloaz, mentet bihan.

**Pièrig**, 12 vloaz.

(Breudeur int).

**Mona**, o mamm-goz, 75 vloaz.

**Fañch**, 58 vloaz, mevel.

**Kluden**, kemener.

**Amezeien**, tri pe bevar.

Ar pezh penn-da-benn a dremen en ti, diou zor warnezañ, unan a bep tu, etre an abardaez-noz hag ar beure da beder eur.

## Diviz kenta

**Mona, Yann, Job**

*(Mona a zo heh-unan o neza e korn an oaled. Yann o tond en ti :*

*Penaoz, mamm-goz, n'eo ket bet Kludenn c'hoaz o tegas ma dillad d'ar gêr ?*

**Mona**

Nann, mabig, n'eo ket bet c'hoaz.

**Yann**

Sell an didalvez ! Hag eñ, teir zizun 'zo o lavared din e oant prest !

**Mona**

N'eus ket teir zizun abaoe 'oe prenet an danvez !

**Yann**

Ma n'erru ket fenoz, me 'houl beza maout ma ne roan ket e laz dezañ !

**Job**

*(O tond en ti hag o selled ouz an daol).*

N'eo ket bet Kluden c'hoaz ?

**Mona**

Nann, mab bihan, pa n'eo ket bet evid ho preur, n'hall ket beza bet evidoh !-

**Yann**

O ! gellet a-walh 'nije bepred degas ma dillad-me d'ar gêr.

**Job**

Perag da re 'raog ma re ?

**Yann**

Lavaret en-devoa din 'nije greet ; ha paeet oa evid hen ober ! N'en-devoa ket evet diou chopinad sistr, disul, diwar ma godell, en ti Mari Chikore ?

**Job**

Din-me en-devoa lavaret kemend-all, ha paeet 'm-oa dezañ ivez eur banne mik en ti Kolaz Liblapenn.

**Yann**

Ne zoñjez ket, moarvad, eo te a yey warhoaz d'an eured ?

**Job**

Da blas ? Da blas 'zo amañ warhoaz ! 'Teus ket a zoñj e oas bet en foar Vleuniou, bremañ 'zo teir zizun, ha me 'oa paotr ar gêr !

**Job**

Ya, ma faotr, mez eur foar hag eun eured n'eo ket memez tra !... Ha pa vefes-te ar brasa evel ma lavarez din aliez a-walh, me eo ar hosa... Da dro e vo da jom er gêr, deiz an adeured.

**Yann**

N'in ket, foeltr gar din ! Ma henderv en-devoa pedet ahanon da vond deiz an eured, ha mond a rin !

**Job**

Ha ma henitervez nevez he-devoa pedet ahanon da vond da heh eured, ha mond a rin !

**Yann**

Gwelet e vo !

**Job**

Gwelet e vo 'ta !

**Mona**

Arsa, bugale, me 'zo souezet ganeoh ! Gouzoud mad a rit zo ezomm unan ahanoh er gêr warhoaz gand Fañch, abalamour d'an diou gazeg a zo prest d'ebeuli. Ha neuze, ho mamm hag ho c'hoar 'zo du-hont dija ; gand unan ouspenn e vo tri ahann, hag a zo brao !

**Yann**

Ya, mez Marharid ha mamm a zo o labourad ! Se ne gont ket evid beza en eured...

**Mona**

Kont, laouen ! Unan ahanoh a vo a-walh warhoaz du-ze, ha Job eo ar hosa hag eo dleet dezañ mond.

**Yann**

Mamm-goz, Job a ya da gement foar, pardon hag eured a ve, ha me a vez tapet dalhmad da vêsa er gêr.

**Job**

Gaou a lavarez, rag n'eus ket pemzeg deiz c'hoaz 'oas bet o vale gand ma eontr en foar Montroulez.

**Yann**

Te 'gont e talv se mond d'eun eured !...

**Mona**

Peoh, eun dro bennag ! Pemzeg deiz 'zo on bouzaret ganeoh ; ne glevan ken bemdez ar memez kaoz hag ar memez tabut ! Bepred oh en em bikillad 'balamour d'an eured. Ma 'mije-me gouvezet pesort talari 'vije amañ gand an eured-se, 'mije miret ma arhant, ha, faot a zillad nevez, 'vijeh chomet er gêr ho-taou !

## **Diviz II**

### **Ar memez re. Kluden**

**Kluden**

Salud ! Salud ! Penaoz ema ar bed amañ ?

**Yann**

Erru 'oas, Kluden ? Ma dillad 'zo ganit ?

**Job**

Biskoaz kemend-all ! Hemañ 'vad a lamm gand an dud ! Azez 'n ez koazez, Kauden !

**Kluden**

*(O lakaad eur pakad war an daol).*

Ha c'hwi 'zo yah bepred, mamm-goz ?

**Mona**

Mond a ran bepred, Kluden, mez eo torret ma fenn din gand an daou astraker-mañ ! Mad 'teus greet erruoud.

**Kluden**

Penaoz 'ta ?

**Yann**

*(O selled ouz ar pakad).*

Ma dillad-me eo, n'eo ket gwir, Kluden ?

**Kluden**

Marteze emaint o-daou aze.

**Yann**

*(O selled adarre)*

'Maint ket !...

**Job**

Gortoz eun tamm, ha tap eur werenn, ma 'h evo Kluden eur werennad sistr ! Euz ar bourk amañ 'zo eur flipad mad a hent, hag an amzer 'zo tomm.

**Kluden**

Ma feiz, bremañ, pan eo erru an abardaez-noz, eo brao a-walh bale. D'ho yehed, mamm-goz !

**Yann**

*(O tifleuza ar pakad)*

Me 'ouie a-walh ne oa nemed eur gwiskamant gantañ ! Ma hini eo, n'eo ket gwir, Kludenn ?

*(Ober a ra d'ar hemener eur zerr-lagad).*

**Kluden**

Mab paour, n'eo ket sur. N'eo ket da hini eo. Hini Job am-eus echuet da genta. Mez te 'po da hini ivez 'benn warhoaz ar beure, beure mad !

**Yann**

Hag out eet d'ober hini Job da genta, ha me lavared dit !... Tez, me 'mo soñj ahanout !

**Kluden**

Mab paour, Job 'zo bihannoh, hag evel-se eo 'n em gavet e hini echu da genta. Arsa, n'an ket da boz, rag labour am-eus muioh evid na rin. Selaou, Yann, n'eus ken nemed ober an toullou boutonou war da chupenn, ober ar mañchou ha staga anezo. Bez' dineh, 'benn warhoaz ar beure e vi ken faro ha Job !

**Yann**

'Rez ket a hoap ahanon, kleved ar rez !

**Kluden**

'H an 'n em zro, 'h an 'n em zro ! Ma ve torret dit 'benn emberr da noz, deus beteg du-mañ, ha te 'welo ha ne lavarn ket ar wirionez !

Kenavo warhoaz ! Yehed deoh bepred, mamm-goz !

**Mona**

Ha deoh ivez, Kluden !

## **Diviz III**

**Pièrig, Fañch, hag ar memez re.**

**Yann**

Louf-torcha ar gurun ! Ya, kerz 'n ez tro ! Me 'gavo ahanout eur wech bennag !

**Job**

Selaou an inosant-mañ ! Penaoz ? 'Po ket da zillad warhoaz ?

**Yann**

Brao eo dit komz, pa 'teus bet da re !

**Job**

Ha neuze, peogwir e chomi er gêr , n'az-po ket ezomm ken prim-ze euz da zillad nevez.

**Yann**

*(O c'hoarzin goap).*

E chomin-me er gêr ? Paour-kêz, gwall-verr eo da spered mar kredez 'vin-me paotr ar gêr warhoaz !

**Pièrig**

*(O tond en ti).*

Bet eo Kluden o tegas an dillad nevez d'ar gêr ?

**Yann**

Ya, re Job !

**Pièrig**

Greet mad int ?

**Job**

Feiz sur, gouez dit. 'H an da weled !

*(Mond a ra traoñ an ti, hag e teu gwisket gantañ eur bragou eun hanter troatad re hir).*

Arsa, pe dall, pe mezo, pe inosant, pe gousket pe betra 'oa Kluden p'en-nevoa greet ma bragou ? Eun hanter re hir eo !

**Yann**

*(O tiroll da hoarzin).*

Hennez 'zo bet greet dit 'benn e kreskjes !

**Mona**

*(O tond).*

Hola 'vad ! Sell pegen hir ! Sach anezañ war-greh !

**Job**

N'hallin biken sevel anezañ uhelloh !

**Mona**

Ma ! Ma ! Memestra ! Sell aze eur bragou kollet !

**Job**

O ! boued ar groug ! Sell petra 'n-eus greet din !

**Yann**

Ba ! gand troha diwarnañ 'vo mad !

**Pièrig**

*(O vuzulia gand eun ere).*

Kement-se re hir eo !

**Job**

Ya, sell pegement ! Red eo lavared eo Kluden dall pe zod !

**Fañch**

*(O tond en ti).*

Hola 'vad ! Sell pesort bragou hir !

**Yann**

*(Eet er-mêz. Souden e tegouez gand amezeien hag e c'hoarz, o tiskouez dezo Job gand e vragou).*

**Job**

*(Da Yann).*

Daoust ha red eo dit mond da lavared d'an oll dond da weled ma bragou ? Kerz beteg ar bourk, ha degas amañ c'hoaz ar mêr hag ar person !

**Eun amezeg**

Feiz d'am douah, aze e-nevoa kollet Kluden e vuzul, red eo lavared !

**Eun amezeg all**

Eun tamm mad a goll eo da Job, danvez kaer evel hennez !

**Job**

Ya, mez kredit penaoz n'eo ket Job a baeo.

**Eun amezeg all**

'Vel just, da Gluden e tle beza ar holl, n'eo ket dit !

**Mona**

*(O trempa soubenn).*

Ar pezh 'zo greet 'zo greet. Bremañ, avad, pan eo kollet ar bragou, eo kollet an devez.  
Re a streuvell<sup>1</sup> a oa amañ ivez gand an eured-se !

**Eun amezeg**

*(Da Job).*

Penaoz e ri d'az pragou ? Kas anezañ da grenna diwarnañ ?

**Job**

*(O sevel e harr).*

Non don toud ! Sell ar mab gaor ! Ya, mez sell pegen hir ! N'on ket 'vid kerzed gantañ !

**Pièrig**

Da vragou koz da zul a helli lakaad warhoaz !

**Job**

Ma bragou koz ? Gand eur chupenn hag eun tog nevez ? N'ouzout ket petra 'lavarez !

**Fañch**

Gwir eo, ne ve ket brao eur bragou koz gand eur gwiskamant nevez. N'eer ket d'an eured 'vel d'ar foar. Du-ze 'vo merhed yaouank e-leiz !

**Job**

*(O trei hag o tistrei).*

Ma ene ! Ya, mez sell pegen hir !...

**Mona**

Ne verraot ket, 'vid kelou chom da zelled outañ ! Kuita 'teus d'ober eo adkas anezañ d'ar bourk.

**Yann**

Ya da, ha Kluden a lezo ma dillad d'echui 'vid adober dillad hemañ. Me 'zo o vond raktal beteg di hag a welo hag-eñ 'vo labouret war dillad all nemed war ma re.

**Fañch**

Se n'eo mann d'ober, berraad eur bragou, ha te a dleje kas anezañ ganit, peogwir eh ez d'ar bourk !

**Yann**

Ma n'eo mann d'ober, Fañch, gra-te al labour !

*(Troha 'ra bara hag amann).*

N'ankounac'hez ket lezel plas ganin 'n ez kwele, e kraou ar hezeg. Pa vin dizro, me yey davedout da gousked.

1 streuvell : strafuill

**Mona**

Ya, kasit ar bragou-mañ hag ar muzul ganeoh, ma mab-bihan !

**Yann**

*(O vond er-mêz, ne respont ket. An amezeien a ya d'e heul).*

**Fañch**

*(War an treuzou).*

Yann, da vamm-goz a lavar dit dond da gerhad ar bragou !

*(O tizrei).*

Ne ra van ebed.

**Pièrig**

Me yey d'ar bourk, mar karit !

**Job**

Chom er gêr, pilet e vefes gand Yann.

**Mona**

Ar penn kaled ! Keuz 'm-eus o veza lakaet ma arhant en dillad dezañ !

## **Diviz IV**

**Ar memez re, nemed Yann**

**Job**

Lezit eñ d'ober e benn ; n'in ket war e lerh. Daoust ha c'hwi, mamm-goz, n'hallfeh ket, kentoh, troha eun tamm diwar ma bragou, an hed gand an ere-mañ ?

**Mona**

Me, mabig paour ? Red deñval eo deut ma gweled d'ober labouriou evel-henn. Fañch amañ, marteze, a hallfe ober eun troh pe eur pleg, ma 'n-eus soñj c'hoaz euz e vicher goz.

**Fañch**

Me ? Ken pell 'zo n'am-eus ket na trohet na gwriet ! Ma vijen bet, evel bremañ 'zo daou vloaz ha tregont tri miz ha pevar devez, oh erruoud euz brezel ar Hrime, se 'nije koustet mann din troha diwar eur bragou nag ober unan nevez ivez. Ma 'm-eus soñj beza dreset seiz hag hanter-kant bragou ha chupenn er memez deiz, an deiz ma oe savet an drapo war dour Malakoff. Ar fuzuillou hag ar sabrinier a yee en-dro, mez ma nadoz ha ma zizaill a yee ivez. Peogwir eun ofiser 'oa bet trohet ha toullet e chupenn dezañ en pemzeg plas. Dond a reas da gaoud ahanon ; eur Breton e oa... *(o klask)* 'm-eus ken a zoñj euz e ano. Me 'gav din 'oa euz kostez Gwengamp pe Blouared : "Fañch, emezañ 'n eur drei e gein, gra eun toullad kraviou din 'barz ar chupenn-ze, 'leh ema ar brasa toullou, rag emberr, a-dra-zur, 'vo ebatou en ti ar jeneral ! ». « Ya, emezon, mez ma stagan ho chupenn hag ho krohen, stag-ha-stag ? ».



« 'Vid kelou 'zo ! emezañ, kuit e vin neuze da vond da gaoud ar medisin, ma wriez war an dro an trohiou 'zo 'n em dillad hag ar re 'zo 'n em hrohen ».

**Job**

*(Oh en em inzaha).*

O ! kemener ar gurun !...Hag eur pez foñs e-neus greet.

**Fañch**

Feiz d'am douah, me 'm-eus dreset liez a vragou ! Mez d'ar houlz-se 'oan en Sebastopol, kompren a rit ?

**Mona**

Ober a-walh a rafeh c'hoaz, Fañch, diouz red.

**Fañch**

Ma vije bet ganin kemend a vrageier em-eus dreset, 'nije ket manket a vrageier din ahann da bell.

**Job**

*(En e zoñj e-unan).*

C'hoant am-eus da gemer ma hontell gantañ !

**Pièrig**

Gand Kluden ???...

**Job**

Gand Kluden ? Gand ma bragou ? Fañch, red 'vo deoh mond warnañ, n'eus ket da lavared !...

**Fañch**

Heu ! heu !

**Job**

N'eo ket daou vloaz ha tregont tri miz ha pevar devez o-deus greet deoh ankounac'haad ober eun troh en traoñ eur bragou ?

**Fañch**

*(O selled ouz ar bragou en eur heja e benn).*

Heu ! Heu ! Ya ! Ya ! Heu ! Re hir eo ! Heu !

**Job**

Me 'ya da dapoud sizail, neud ha nadoz !

**Mona**

Lez Fañch da zebri e goan ! Goude 'vo gwelet !

**Fañch**

Moereb koz, al labour-ze 'oa evidoh. Me, 'ouzoh a-walh, 'zo diskrog re bell 'zo diouz ar binviou-ze...

**Mona**

Me ? Gwriad ? Paour-kêz Fañch ! Ne welan ken toull an nadoz, abaoe pell 'zo ! Deuit d'ho koan bepred.

*(Ar zoubenn war an daol).*

Kerz, te, da lemel ar bragou-ze, ha deus d'az koan.

*(Job a ya da lemel e vragou. Dizrei a ra gantañ en e zorn, e-kichenn an daol, e leh ema ar re all o koania).*

**Job**

Ha lavared n'ema na mamm na Soaz er gêr ! C'hwi 'lavar, mamm-goz, eo dleet din mond warhoaz d'an eured, mez penaoz eh in-me gand eur zah evel-henn war ma foñs ?

**Fañch**

Hag e chomfes er gêr, ne vo biken gwasoh dit evid din !

**Mona**

*(O sevel).*

Eiz eur tremenet eo, eh an d'am gwele da ziskuiza ma fenn. Debrit ho koan, ma faotr bihan, ha c'hwi, Pièrig, lavarit ho pater hag it d'ho kwele !

**Job**

Me 'm-eus ket naon.

**Fañch**

Bet 'teus leiz da gov euz da vragou. Ma ! me 'ya d'ober ouz ma hezeg.

**Job**

*(P'ema Fañch o tehed).*

Trist eo, memestra, 'zo amañ daou hag a hallje dresa ma bragou, ha hini aneze na raje ! *(E benn etre e zaouarn)*. Ma n'an ket warhoaz d'an eured, ne welin ket Marharid Boustouleg. 'Baoe foar Vleuniou on bet heb kelou anezi... Ma verrafen ma bragou me ma-unan ? Kement-se ne dle ket beza eun dra diêz. *(Klask a ra er pres sizailh ha neud ha nadoz)*. Sell amañ ar muzul. Kement-mañ am-eus da droha diwarnañ. *(Troha 'ra goustadig. Kleved a ra trouz hag e serr e stal)*. Daoust ha n'eo ket eet Pièrig da gousked ? *(Mond a ra da weled)*. Eo !... Al loar 'zo sklêr. Amañ, ouz ma frenest, me 'ray eur hrav. 'Vin ket pell. A ! Yann, n'houleh ket kas ma bragou ganeoh ? Mad ! Mad ! N'eus forz, dreset 'vo bepred, ha warhoaz eh in d'an eured, bezet droug ha mad ganeoh. *Gwriad a ra)*. Ha n'eo ket greet al labour-ze kenkoulz ha gand kemener ebed ? Kraviou Jezuz hir ha paduz, ar re-ze eo ar re wella. Ar starta eo lakaad an neudenn en nadoz. Red-mad eo din kemer goulou. Mad, setu greet an taol. Gwelom hag-eñ eo a vent vad din bremañ ? Mad, sur ! Goude an eured, me gaso anezañ da Gluden d'ober eun adtremen warnañ. Ha bremañ, da gousked ! 'M-eus ket kavet hir an amzer. Ar vicher gemener, hervez feson, 'zo eur vicher ha n'eo ket enaouüz.

*(Lakaad a ra an nadoz hag an traou er pres, an tamm danvez 'n e hodell hag eh a en-dro).*

## Diviz V

### Mona

*(O tond en ti, eur goulou en he dorn).*

Sed amañ eun nozvez ! Lavared n'on ket evid kousked gand ar bragou-ze war ma spered ! 'Vel ma lavare Fañch, n'eo ket eun taol ampartiz d'ober, krenna eun tamm diwarnañ. Hag ar paour-kêz Job 'n-eus muioh a zigarez da vond du-ze evid n'e-neus Yann. 'H an d'ober eun tamm dres d'e vragou, bepred, forz penaoz. Neuze 'vin dineh da gousked, hag eñ, ar paour-kêz bihan 'zo anezañ, a vo laouennoh warhoaz ar beure, pa gavo e draou par.

*(Kemer a ra er pres ar bragou hag an traou all).*

Pièrig a lavare 'oa red troha kement-mañ diwarnañ.

*(O tispaka ar bragou hag o lakaad he lunedou).*

Ma ! Ma ! 'velkent ! Greet e-neus Kluden amañ eun tamm labour difripon, eun tamm labour ha n'eo na brao na mad ! Sell, pebez kraviou, ha penaoz eo trohet traoñ ar bragou-ze ? 'M-eus aon, diwar ar wech-mañ, 'nevo ken ma fratik ! Preset 'oa, gwir eo ; mez n'eus forz, 'vez ket greet labour evel-henn d'an dud ! Kleved 'rey ganin ! Eun tamm danvez kaer evel-henn !

*(Muzulia a ra ; hag e troh eun hanter troatad).*

Evel-se ne vo ken re hir, ha gwelloh trohet 'vo c'hoaz evid na oa a-raog ! Mar gallan, bremañ, gand ma hoz daoulagad, lakaad an neudenn en nadoz.

*(Goude liez a dalioul-êsa e tap an toull. Gwriad a ra).*

Mad eo evel-se ! Ha neuze, goude an eured, ma kar ; e kaso anezañ da beurdresa.

*(Diou eur a zon).*

Diou eur ! Amzer a-walh 'm-eus c'hoaz da gousked. N'on ket eur wall-gouskerez. Feno, dreist-oll, o soñjal er paour-kêz Job, gand e vragou re hir, ne oan ket evid serri lagad ebed. Ar Yann-ze 'zo eur pez divergont ! Lezit-eñ, 'vid ma helou, n'ay ket warhoaz d'an eured, pan eo dreset bragou e vreur... Bremañ, e kouskin êzetoh, mar bez bolontez Doue !

*(Mond a ra er-mêz gand he goulou).*

### Fañch

*(O tond gand eul letern marchosi).*

Ma feiz da douah, koulz eo din 'ta mond war ar bragou. Bremañ bepred, e vin didrouz da labourad ha den ne welo ahanon. Yann 'zo du-hont, er gwele, eun eur 'zo o tirohal, hag ar re all a zo pep hini gand e hun. Gwelom hag-eñ 'm-eus ankounac'haet ma micher goz...

*(Kemer a ra bragou hag all er pres).*

Arsa, an ere-mañ eo ar muzul. An hed gand hemañ 'm-eus da droha... Lavared a-walh a reer, tud vad, mez chom er gêr, deiz eun eured, abalamour d'eur bragou re hir, 'zo kriz ha kaled da galon eur paotr yaouank. Gwelom 'ta, Kluden, ha me rey da vragou dit !

*(Troha a ra eun hanter troatad war e nañ).*

Aze, Job, setu-c'hwi bremañ ho pragou er memez hed ganeoh... Eur wech, avad, 'm-oa gwelet unan e Sebastopol, hag eo ar hontrol a hoarvezas gantañ. Hennez a oa bet krennet diwar e ziouharr da lakaad en hed gand e vragou. Braz e oa. Hennez a oa braz. « Ha brasoh 'oa evid Yann », a houlennit-hu ? - « Ya, louz ! E vragou e skeud-se, 'oa berr ; ne oa bragou ebed a-vent dezañ. Hag eñ o tond da gaoud ahanon eun deiz : « Fañch, qu'y dit - eur Gall e oa ; C'est y toe l'couturier ? - Oui », que j'lui dis. « Et bien, tu me mettrais t'y bien un' rallonge à c'te fichu pantalon ? J'peux pas fair' voer mes mollets aux Cosaques ! ». - « Si tu veux, que j'lui dis. » Mad ! Setu e teuas ar Gozaked warnom, a-greiz-konta, hag eñ 'oe galvet d'an tan. 'Benn 'oa noz, ne oa ken re verr e ziouharr. Trohet 'oant bet dezañ 'rez d'e zaoulin.

*(Eur pennad ema hep komz).*

Ma, Kluden, pa oan 'n ez oad, me 'oa gwelloh kemener 'vid evel-hen ! Sell amañ eur harr vragou hag a oa trohet a-skiz hag eben 'oa eün ! Ha pebez kraviou ! Ma welfe moereb-koz al labour-mañ, te glevfe da begement. Mad eo dit on erru da zivanka ahanout. Mez pa 'mo eur bragou d'ober, n'eo ket te a yey warnañ !

Me 'gav din aze emaint 'n eur skwer ha gwriet evel zo dleet. 'Vidon da veza eet diwar ar vicher abaoe daou vloaz ha tregont, tri miz ha pevar devez, on barreg c'hoaz ganti. Alo, ma mignon Job, sell, te aze bremañ eur paotr moust. 'Benn disul e paei eur banne din.

Peder eur ! En koulz mad on ! Bremañ, me ya da lakaad o lein d'am hezeg.

*(Mond a ra er-mêz gand e letern marchosi, goude beza lakaet pep tra en urz).*

## Diviz VI

**Job, Yann**

**Job**

*(O tond en ti, peder eur o son).*

Peder eur ! N'on ket re abred. Daoust ha deut eo e zillad gand Yann euz ar bourk ?

**Yann**

*(O tond en ti).*

Sell, aze 'oas ken beure ?

**Job**

Ha te 'ta ! Te 'zo paotr beure mad ivez, disheñvel diouz an deiziou all. Deut 'oa da zillad ganit deh da noz ?

**Yann**

'Oant ket, mez Kluden a deuio bremañ souden d'o degas d'ar gêr. Koulz hag echu 'oant pa oan deut ahano. Ha da vragou ?

**Job**

Ma bragou 'zo dreset.

**Yann**

*(Hir e fri).*

Ha 'n-eus dreset piou anezañ dit ?

**Job**

Me !

**Yann**

Te ?

**Job**

Ya, me ma-unan.

**Yann**

Neuze, moarvad, eo dreset mad ?

**Job**

Mad a-walh evid mond hirie d'an eured.

**Yann**

Me 'garfe gweled evid kredi.

**Job**

Diskouez a-walh 'rin anezañ dit. Tap ar goulou !

**Yann**

N'eus ezomm ebed a houlou, an deiz 'zo o tond.

**Job**

*(O kemer e vragou).*

Sell-eñ aze !

**Yann**

Ya, mez lak anezañ warnout da weled.

**Job**

*(O tispaka e vragou).*

Hola 'vad !

**Yann**

Bragou Pièrig a zo deut ganit.

**Job**

Bragou Pièrig ?... Ma hini eo, hag a douefen ! Mil malloz ! Piou an diaoul a zo bet amañ oh ober an inglodo-mañ en-dro d'am bragou ?

**Yann**

*(O c'hoarzin a-bouez-penn).*

Feiz d'am doulle, mab paour, ar wech-mañ n'eo ket ken re hir !

*(Job a lak anezañ war-horre egile).*

Ne dap ket dit beteg pennou da zaoulin ! Te 'vo eun ibil, avad, da vond hirie d'an eured ! Ya, ya, kerz, mab paour, kerz gand da vragou Kernevad ! Me 'garje, 'vid pemp kweneg, gweled ahanout o vond da zañsal evel-se ! A ! A ! A ! O ! O ! O ! Hi ! Hi !...

**Job**

Emaout o serri da houg ! Marteze eo te e-neus greet an taol-mañ ?

**Yann**

Me ? Ha me er bourk beteg hanternoz hag abaoe eun eur 'n em gwele ? N'eo ket te 'teus lavaret din raktal 'poa dreset da vragou ? N'ez ket da damall d'ar re all ar pez az-teus greet te da-unan !... 'N em dromplet 'po bet gand da vuzul, sell eno ! A ! A ! A ! Hi ! Hi ! Hi ! 'Welez ket sklêr, mab paour, pa'z-poa greet da labour. Mez ba ! hennez 'zo mad sur evel-se ! Gwechall 'oa ar hiz da zougen brageier berr, ha n'az-po nemed lavared du-hont : « 'Daolit ket ple, bragou ma zad-koz 'zo ganin !... A ! A ! A !

**Job**

*(O furchal er pres).*

Me 'ouie a-walh ! Sed amañ daou bez danvez trohet, hag eun all a zo ganin. Se 'ra tri. Ha n'eo ket me 'm-eus trohet aneze o-zri, manestoulle<sup>1</sup> gar din ! Yann, Yann, diwall ne vefes ket te o c'hoari din an dro-mañ !

**Yann**

Pa lavarn dit, kred ahanon, n'on bet fenoz nemed er bourk ha 'n em gwele !...A ! A ! A !

## **Diviz VII**

**Fañch, Mona, hag ar memez re**

**Fañch**

Petra hoarvez amañ, pa reer kemend-all a drouz ?

**Mona**

Me 'zo bet dihunet gand an iho<sup>2</sup> hag ar jolori !...

**Fañch**

Feiz 'vad, me 'oa o leina ma hezeg, hag a zo bet souezet a-walh o kleved kement-mañ a hoari-gaer !

**Job**

Fañch, touit din war ho feiz n'eo ket bet Yann en ti fenoz, adaleg eun eur !

**Fañch**

---

<sup>1</sup> Manestoulle : malloz-Toue.

<sup>2</sup> iho : marteze ar pez a vez lavaret d'ar hezeg : i.. ; ho !

Perag ?

**Job**

Perag, sur !

**Fañch**

'Gredan ket 'vefe bet nebleh, rag ganin 'oa o kousked, hag ema o paouez sevel.

**Job**

Koulskoude n'eo ket eun huñvre eo kement-mañ ! C'hwi 'zo dihun, ha me 'zo ivez !  
Ar mab gaor-mañ pe n'ouzon ket piou an diaoul skorn 'zo bet o tismantri ma bragou  
din fenez. Sellit !!!

**An oll**

O ! Hola 'vad !...

**Mona**

Feiz, mab, me 'lavar on savet hag em-eus trohet eur pezh diwarnañ, mez 'm-eus ket  
trohet kement-se, 'n oll gar din, peogwir 'm-eus kemeret ar muzul...

**Fañch**

Saperdie ! Neuze 'ta, red din ivez anzav ma fehed. Me 'zo savet ivez, peogwir 'oa Job  
o kas berraad e vragou, hag em-eus trohet kemend-all !

**Job**

*(O koueza e ziouwereh).*

He me 'm-oa trohet kemend-all a-raog !...

**Mona**

Arsa, Fañch, d'ober petra 'lavareh ket din e oah en soñj dresa e vragou da Job !

**Fañch**

Ha c'hwi, mamm-goz, perag ne lavareh ket din e vijeh savet da dresa anezañ ?

**Yann**

Hi ! Hi ! A ! A ! Taga 'rin ! Aiou ma hov ! Aiou ma hostou !... Aiou ma fenn ! Hi ! A !  
A ! Biskoaz 'm-eus gwelet eun taol ken fentuz.

**Fañch**

*(O kravignad kostez e benn).*

Nom dou toud ! Mamm-goz, da betore koulz oh savet ?

**Mona**

Da hanternoz, pe war-dro.

**Fañch**

Dal ! Sell, me 'zo bet o troha an tamm diweza !

**Job**

*(O selled gand kalonad ouz ar bragou).*  
Deh e oa re hir, hag hirie eo re verr !

**Yann**

*(Gand goap).*  
Ha reor Job a chomo er gêr !

**Mona**

Diwallit, kanfard, petra n'errufe ivez ganeoh.

## **Diviz VIII**

**Ar memez re. Kluden. An amezeien**

**Kluden**

*(O tond en ti).*  
Amañ da vihanna 'zo tud joaiuz ha beure mad ! Abaoe toull an hent e kleven hemañ braz o sklokal. Petra 'zo a-nevez ganit er beure-mañ, pan out eet en godin en eur zavel ?

**An amezeien**

*(O tond en ti).*  
Petra 'zo ? Petra 'zo ? Dihunet eo ar vilajenn a-bez !

**Yann**

*(O c'hoarzin).*  
Deh 'poa gwelet paotr e vragou hir, ha c'hwi 'wel hirie paotr e vragou berr !

**Mona**

Santez Anna ! Amañ zo c'hoarvezet eun taol fenez ! Soñjit 'ta...

**Fañch**

*(Mezeg).*  
Gortozit bepred, ma'h in er-mêz.

**Yann**

*(Gand goap).*  
Nann, laouen ! N'eus ket re ahanout ! Sell amañ, Kluden, eur breur dit !

**Kluden**

Ma ! Me 'zoñj petra 'zo erru...

**Yann**

'Zoñjez ket ! Re fentuz eo !

**Amezeien**



Lezit 'ta mamm-goz da lavared !

**Mona**

Soñjit deoh, Kluden 'n-devoa degaset deh da Job eur bragou kalz re hir, hag om bet tri fenez, heb gouzoud an eil d'egile, o troha diwarnañ !  
(*Yann a ziroll da hoarzin ken e teu ar paz dezañ*).

**Kluden**

(*Goude eur poz*).

Ma feiz 'ta, neuze eo Yann a zo tapet !

**Yann**

(*O tihoarzin*).

Petra lavarez ?

**Kluden**

Evel-se 'ma kont ! An hini a greder 'zo tapet, n'eo ket tapet ; hag an hini a greder n'eo ket tapet, a zo tapet.

**Yann**

Peseurt kaoziou eo ar re-mañ ? N'eo ket divinadennoù 'zo ganeom ! 'Teus ket c'hoant da lavared, moarvad, eo me 'zo tapet ?

**Kluden**

Eo, ma hamarad paour. Se, end-eeun, am-oa c'hoant da lavared, nemed e oa gwell ganin e lavarjes da-unan.

**Yann**

Farsal a rez !

**Kluden**

Madedoue, 'ran ket, siwaz ! An oll o farsal.  
Keuz braz am-eus zoken, mez greet eo an taol, ya, siwaz ! Greet eo !

**Yann**

(*Nebet*).

Peseurt taol 'ta ?

**Kluden**

Ma hamarad paour, pardoni a ri ahanon ?

**Yann**

Perag ? Komz a ri, da vihanha !

**Kluden**

(*War eun ton trist*).

Sell petra 'm-eus greet, ha da wella kamarad ha da wella pratik am-oa !...

**Yann**

Hag az-teus greet petra ?

**Kluden**

An diou glakenn a oa du-mañ deh, pa oan oh ober ma fakajou, an diou doupi-ze 'zo kaoz, sur mad, e kemeris an eil evid egile !

**Yann ha Job**

An eil evid egile ?

**Fañch**

Arsa, Kluden, dizaha 'ri da gaoz eun dro bennag ?

**Kluden**

Me 'm-oa 'n em dromplet deh d'abardaez ha...

**Yann ha Job**

Ha ?

**Kluden**

Ha degaset ganin e-leh bragou Job...

**Yann**

*(O sevel e ziouvreh).*

Forz !

**Kluden**

... Bragou Yann.

**Yann**

*(Glaharet).*

Ma bragou eured !...

**Job**

*(Laouen).*

Ya, ya, ma faotr, dal da vragou !...

*(O stlepel ar bragou berr dreist d'an daol).*

**Yann**

*(Oh adstlepel anezañ).*

'M-eus ket ezomm euz an dra-ze !

**Job**

*(O teurel anezañ da Yann).*

Na me ! N'eo ket dit eo ?

**Yann**

*(Oh adstlepel ar bragou).*

Din-me ? Bremañ, p'az-teus draillet anezañ, kah e-barz ivez, ma kerez !...

**Job**

*(Oh adstlepel ar bragou).*

Sell eun ebeul amañ !

*(Evel-se e stlapont hag e tistlapont eur pennad ar bragou an eil d'egile, an amezeien ha Fañch o c'hoarzin, Kluden o klask harz anezo, ar vamm-goz juntet he daouarn. 'Benn ar fin, e krog Yann en dillad a zo pozet war an daol. Mez Job a grog warno ivez, hag en em gav hemañ unan a bep tu o sach a war vragou nevez Job).*

**Job**

Emaout o laoskad ar bragou-ze ?

**Yann**

*(O sach a).*

Hemañ 'vo din, pa lavaran. 'Teus ket draillet ma hini.

*(Kluden ha Fañch a deu d'o dispartia).*

**Mona**

*(O skeid gand he hevell).*

Paouezet hemañ ! A-walh eo ! Fin d'ar pardon ! C'hwi, ma faotr *(da Yann)*, lezit ar bragou-ze gand ho preur, kleved a rit ? Na vint ket draillet o-daou ! Beza 'vint ?

**Yann**

*(O tiskregi en eur ouela).*

Ya ! Job 'n-eus trohet diwar ma bragou a-ratoz-kaer da harz ahanon da vond d'an eured !... Job a ouie 'walh e oa hennez 'oa ma bragou !

**Mona**

Job, na me, na Fañch, ne ouiem seurt ebed ! Ma karjes beza kaset ar bragou ganit d'ar bourk, pa lavaren dit, penn-beuz, Kluden en-dije anavezet anezañ ha kement-mañ ne vije ket c'hoarvezet. Eur gentel vad eo dit, ma faotr ; ne vi ket dalhmad o kas taga da vreur hag ober goap anezañ, kaoulz hag euz ar re all ! Bremañ e chomi er gêr...

**Job**

Ya, nemed ha c'hoant en-defe da vond da zañsal gand bragou e dad-koz...

**Yann**

Kluden ray din eur bragou all !

**Mona**

Bragou ebed ken, nemed hennez !

**Eun amezeg**

*(Da Yann).*

Ma feiz, mab kêz, setu bremañ eo te eo paotr e vragou berr.

## **Kluden**

Ma Doue, war an tamm pri-mañ, den ne oar petra a hall erruoud gantañ !